


---



## CHANSON NEVEZ

*Var sujet ur Filouter en deus tromplet e Hostis.*

---

Var un ton nevez.

**M**e ho suppli, oll tud yaouanc, da zont da glêvet  
Ur son meurbet divertissant a nevez compost,  
A zo grêt da un den yaouanc, ur filouter fio,  
Mar ententet, ar farç plesant a rai deoc'h c'hoarzin.

Arabat eo, compagnuez, ober dioutân :  
Bete re a filouterien so dre ar vro-màn ;  
Nemet hepken avertissa an oll hostisiu  
Da ziouall na zeuint da loja ar filouterien.

An den-mâ a oa brao guisqet, un den a fêçon ,  
Me sonch dîn e voa guinidic dèmeus a Leon :  
Squis e voa er guær, re vaguet, meur a hini so ,  
M'en deus lajet eu e speret mont da redéc bro.

E Montroulez hac e Guengamp, e Treguer eo bet,  
E Sant-Malo, hac e Dinan, hac e Sant-Brieç ;  
Partout oa o clasq e fortun, o poursu e chanç ,  
Arc'hant en doa casset gantân bars en abondanç .

Baleet en deus bete Paris , ar filouter fin ;  
E yalc'h a so deut da blada souden alafin :  
Distroet eo bet d'an Naonet , ha bet e Roazon ,  
Hac anfin e zeo bet manget e bourvision.

Evel ma voa bet custumet da ober cher vat ,  
Evit ar vech e voa maguet calz re dilicat ,  
E qemeras effrontiri da c'houlen loja  
Ebars en un hostaliri , n'oa diner gantâ.

Evel ma voa quer brao guisqet , en ty eo antreet :  
Bonsoir , emezàn , va hostis , ha me vo lojet ?  
Coania fell dìn em plijadur en ti-mâ fennos ,  
Hac iveau eva ur banne abars n'em repos.

Servicher , eme an hostis , va mignon antreet ,  
Servichet e viot a dra certen ar pez a guerfet :  
Azeet amâ en ur gador e qichen an tân ;  
Qemeret ur banne da eva da c'hortos ho coan.

Servichet e oe va mignon eus a guement mad  
A zesire e galonic a draou delicat.  
Guïn Bourdel demeus ar guella , hac iveau guïn Spagn ,  
Ha liqueur an excellanta tout da vab ar c'hagn.

P'en devoe debret hac evet , c'hoariet e roll ;  
D'ar plac'h en deveus lavaret : diservichit an dol ;  
Tennit ho plajou , boutaillou , iveau ho cuer en ,  
Va c'hassit d'am c'hampr da gousqet d'ur guele qempen.

Amâ e commanças nec'hi brema'n den yaouanc ,  
Penaus e paeje e hostis , n'en devoa qet arc'hant :  
Evet emeus guïn , emezàn , ha grêt ameus cher ;  
Petra rïu-me evit paea , n'emeus qet un diner ?

Epad an nos en e vele e oa chagrinet,  
O sonjal en e baemaot , n'alle qet cousquet :  
N'allin qet mont eus an ti-mâ certen e nep guis ,  
Ma ne allan caout ur voyen da baea'n hostis.

Guelit bremâ ar finessa eus ar filouter fin :  
Un diou pe deir heur qent an de e yas er jardin ,  
Buan e zeo bet commancet da doulla an douar ,  
E vragou en deveus plantet en toul-se ractal.

P'en doa enterret e vragou , e yas en e vele ,  
N'euze n'em laqas da gousket da c'hortos an de ;  
Gout a ré mad , ar filouter , e teuje aben .  
Da ober d'an hostis paea ar scot pen-da-ben.

Antronos vintin pa savas evit partial ,  
Pa ne gave qet e vragou , e commanç crial :  
Fors! va mignonet , emezàn ; sicour , me ho ped ,  
Ha va arc'hant ha va bragou a so tout laeret.

An hostis hac an hostises d'an nec'h so pignet ;  
Chomet e repos , den yaouanc , petra so c'hoarveet ?  
Hac e ve collet ho pragou , se n'en deo netra ,  
Arabat eo hon decria , ni ya d'e baea.

N'en deo qet hepken ar bragou am gra chagrinet ,  
Va oll arc'hant a voa ennân : me so ruinet .  
Beza voa certen en arc'hant hac en aour melen  
Daou c'hant scoet , ha pêvar real n'em gave ouspen .

Fouillet e voa bet dre an ty ar servicherien ,  
Mevel , mates , pautr marchossi , bugale oc'h-pen :  
En a voa sur oc'h e affer a grie bepret :  
Penaus e zin-me d'am c'charter , tout e zòn laeret .

Ententit, emezàn, hostis, bars e bêr langach ;  
Ma na rentit dìn va bragou, me rei deoc'h domach ;  
Evidòn me gavo testou, pa vanqfe cant dìn,  
Penaus ne oan qet divragou pa zeuis d'ho ty.

Evidòn-me so den honest, mar deus er c'hontre,  
Ne fell qet dìn ho ruina, pell dioc'h qementse ;  
Roit dìn ur bragou mezer ha cant scoet oc'h pen,  
Mè bardono deoc'h an anter, ne c'houlennàn qen.

An hostis hac an hostises eus a galon vad  
A gont dezàn prest e gant scoet tout en ur yalc'had,  
Hac iveau ur bragou nevez eus a vezer Saos ;  
Ar filous o c'hemer buan, pa voa mad e gaos.

Rei a rejont da zijuni dezàn qent partia ;  
P'en doa pardonet an anter, o doa joa ountâ :  
Pront hep sellet en dro dezàn e zeo partiet :  
Qenavezo, hostises, emezàn, ar c'henta guelet.

Abars nemeur goude'n hostis o terri ar jardin,  
En deus cavet bars en douar bragou ar pauvr fin,  
Hac én o commanç da grial eus a bouez e benn :  
Houmâ so tro ur filouter ! ha me so un azen.

Qement hostis so er vro-mâ a ranqfe donet  
Da ober goab eus ac'hanòn ; bremâ me so baro tiet :  
Collet emeus eta cant scoet, ur bragou mezer,  
Ha c'hoas emeus lardet e gof d'am fripon tam laer.

Bremâ e teuàn da avertissa an oll hostisien  
Ma tiouallint dre guement-mâ ouz ar filouterien :  
Na dleont qet en em facha evit e glêvet,  
Din-me va-unan ar goassa, me so goall diet. FIN.

CHANSON  
AR C'HORN BUTUN.

---

O Corn charmant, plijadurus,  
Corn carguet a remejou,  
Tortillat butun moguedus ,  
Te so leun a vertuziou !  
Te c'heus ar vertuz spicial  
Da renta pur ha neat  
Demeus va oll humoriou fall  
Va empen, va daoulagat.

C'houi, labourerien an douar ,  
Squis, fatig o labourat ,  
Taolit ho pal, ho tranch, ho mar.....  
Deut da laqat eur e'horniat.  
En eur fêçon miraculus  
Ho courach prest a gresco ,  
Dre vertuz ar c'horn moguedus ,  
Ho corf mad a labouro !

Estomagou casi breinet ,  
C'houi a deul a dorchadou  
Demeus ho peultrinou carguet  
Ar c'hlastr ouc'h ar mogueriou ;  
Lonqit guinaouadou moguet ,  
Ho pilou a zissipo ,  
Hac hoc'h estomac pur rentet ,  
Evel cleyer a sono.

Ha c'houi , daoulagad coarennet  
A red evel diou feunten ,  
Evel caouennet n'ellit qet  
Supporti ar sclêrigen ;  
Prenit corn butun , liassen ,  
Fumit , moguedit outo ,  
Hac evel ouc'h diou stereden  
Ho taoulagad a vrillo.

C'houi , pennou teval , chagrinet ,  
O compren ho maleurieu ,  
C'houi tud a grandeuriou ar bed ,  
Hep caout outo remejou ,  
Sentit ouzin , ha qemerit  
Hep Morse sonjal enno ,  
Ho corn , ho putun da fumi ,  
Ho chagrin a dremeno .

C'houi, espernerien d'an arc'hant,  
Ouc'h ar beorien, tud cruel;  
C'houi ives, tud cre, tud puissant,  
James ne sonjit mervel.  
Fumit hac e velot certen  
Evel ho poulliou moguet,  
Ho puez er bed-mâ dremen  
Hoc'h arc'hant n'ho souten qet.

Tortillat butun ravissant,  
Pa cuelàñ e ludui,  
E seblant din guelet patant  
Va c'horf trist o consommi.  
Pa remerqàn va bouill moguet  
O vont pront gant an avel,  
E seblant din guelet bepret  
Imach va buez mortel.

Tabatieren, arc'h allianç,  
Closen, couffr a loustoni,  
C'houi oll a lezàñ er silanç,  
Pa n'ellàñ qet ho meuli,  
N'oc'h eus qet qen vertuz nemet  
Da intra an empennou,  
Da derlussennat ar guenet,  
Pa guezit a dorchadou.

Evel ouc'h an amann rouset,  
Pe vardos chiminalou,  
Emâ ho fronellou, merc'het,  
O cueza a veradennou  
Eul liqueur, poeson accusus  
Var fleurennou ho qenet  
An tenzor-se qer precius  
Espernit-én, p'oc'h pedet.

Ne zeus netra qer coant er bed,  
Da zaoulagad ur fumer,  
Evel ur c'horn brao culottet :  
Se en rent meurbet fier,  
Pa vez en e zorn un diren,  
Un tam tont, hac ur men-tân,  
Ne alfec'h biqen caout un den,  
Qen occupet eveltân.

Sellit demeus ur fri butun,  
Bepret leun a loustoni  
Ha guelit hac én so nicun  
A fumerien evelti....  
Ur briserez a souill bepred  
Godel, piecetezen ;  
Ur fumer, bepret so guelet  
O scarza neat e biben.

FIN